






« Cahier de balade » Kaier beaj


Demat, **Marjela** eo ma anv.
Marcelle 'oa anv ma mamm-gozh eus
tu ma mamm. E Okitania e oa-hi o
chom.
Anjela 'oa anv ma mamm-gozh eus tu
ma zad. E Breizh e oa-hi o chom.
Deus da bourmen ganin.

-  Dirak ar goulennoù aesañ e kavi ur
gaoñenn-gelvez.
-  Dirak ar goulennoù diaesañ e kavi
ur gistinenn flemmus !

Dit-te da zibab ar goulennoù a blijo dit !

-  Nav rannvro a gaver en Okitania : ur vro vras an hini eo !
Ha gouzout a rez pelec'h emañ Okitania war ar gartenn ?
Lak livioù war ar gartenn da ziskouez pelec'h emañ Breizh hag Okitania.

Faziañ a c'hellez ober : gwiriekaat a ri diwezhatoc'h, ma fell dit !


-  Tro an diskouezadeg 'p eus graet bremañ.
Ha gouest out da anavezout Marcelle hag Anjela ?
Skriv anv pep hini dindan he skeudenn.

Samuel Lewis, un den a orin saoz hag a zo o chom e Breizh, an hini eo en deus treset anezho amañ.

-  Ha gouest out da lavarout anv menaj pep hini ?
Tres biroù evit liammañ anvioù Marcelle hag Anjela gant anvioù ho menaj.

Le bas de l'eau
Germont
Traoñ-an-dour
Traoñ-sur-Germont
Grammont

Anjela
Marcelle

-  Piv he deus skrivet « J'ai tout reçu des gens » ? Marcelle, Anjela, hini ebet ?
Displeg da respont (diwall, ur pech ez eus marteze) ?
-



Kaier beaj

Demat, **Marjela** eo ma anv.

Marcelle 'oa anv ma mamm-gozh eus tu ma mamm. E Okitania e oa-hi o chom. Anjela 'oa anv ma mamm-gozh eus tu ma zad. E Breizh e oa-hi o chom.

Deus da bourmen ganin !



Dirak ar goulennoù aesañ e kavi ur graññenn-gelvez.



Dirak ar goulennoù diaesañ e kavi ur gistinenn flemmus !

Dit-te da zibab ar goulennoù a blijo dit.



Nav rannvro a gaver en Okitania : ur vro vras an hini eo !

Ha gouzout a rez pelec'h emañ Okitania war ar gartenn ?
Lak livioù war ar gartenn da ziskouez pelec'h emañ Breizh hag Okitania.

Faziañ a c'hellez ober : gwiriekaat a ri diwezhatoc'h, ma fell dit !



Tro an diskouezadeg 'p eus graet bremañ.
Ha gouest out da anavezout Marcelle hag Anjela ?

Skriv anv pep hini dindan he skeudenn.

Samuel Lewis, un den a orin saoz hag a zo o chom e Breizh, an hini eo en deus treset anezho amañ.



Ha gouest out da lavarout anv menaj pep hini ?
Tres biroù evit liammañ anvioù Marcelle hag Anjela gant anvioù ho menaj.

Le bas de l'eau

Germont

Traoñ-an-dour

Traoñ-sur-Germont

Grammont

Anjela

Marcelle



Piv he deus skrivet « J'ai tout reçu des gens » ? Marcelle, Anjela, hini ebet ?

Displeg da respont (diwall, ur pech ez eus marteze) ?

.....
.....



E-barzh ur varzhoneg bet skrivet gant ma mamm-gozh Anjela ez eus ur ger diaes : « **andell** ». War ar banell « Skrivañ » emañ.
Petra dalvez ar ger-mañ ? Klask e-barzh ur geriadur ma 'p eus ezhomm :



Plijout a rae d'am mamm-gozh Marcelle c'hoarzhin. **Klask ar pezh a lavare-hi diwar-benn ar c'hoarzh** :

Sot e oa ma mamm-gozh Anjela gant he chas. Sell ouzh ar banell « Les petites choses ». Penaos e vez lavaret « **petites choses** » e brezhoneg ? Kavout a ri ar ger-mañ e-barzh barzhonegoù Anjela :
Skriv amañ traoù munut hag a blij dit :

Troet eo bet barzhonegoù brezhonek Anjela e galleg gant **Paol Keineg**. Petra eo anv e levr :

Cinq poires Quatre poires Quatre pommes



N'am eus ket soñj pegoulz 'oa aet ma mamm-gozh Marcelle da anaon. Gouzout a rez ?
Pe oad 'oa ma mamm-gozh Marcelle pa oa aet ma mamm-gozh Anjela da anaon ?

N'on ket re drist koulskoude rak ur bern barzhonegoù o deus treuzkaset din. Darn anezho a zo bet kuzhet e-barzh an diskouezadeg-mañ. Ha kavout a ri anezho en-dro ?Kae da glask unan hag a blij dit ha skriv e ditl amañ da heul :

Setu : yezhoù all a gomzez bremañ, dizoloet 'p eus ar barzhonegoù japanat « haikou », hag anavezout a rez anvioù delioù ar gwez.... Gellout a ri kenderc'hel da enklaskoù er gêr bremañ.

Ma fell dit gwelout Anjela evit gwir, skriv al liamm-mañ war da urzhiataer, gant da dud, hag e c'helli gwelout ha klevout anezhi :


<http://fresques.ina.fr/ouest-en-memoire/liste/recherche/anjela/s#sort/-pertinence-/direction/DESC/page/1/size/10>

Ma blij an tresadennoù-bev dit e c'helli mont da sellout ouzh « Bennozh dit », savet diwar ur varzhoneg bet skrivet gant Anjela, war lec'hienn JPL Films (graet eo bet an tresadennoù gant greun, war plakennoù gwer) : <http://jplfilms.com/?portfolio=bennozh>

Poent eo din mont bremañ. Un dro-c'houzoug a savimp ar wech a zeu gant greun, mat eo ? Pe ur c'hwitell skav ? Pe neuze ez imp da chaseal kizhier ar c'hoadoù asambles ?

Kenavo ! Adissiatz ! Au revoir !

Marjela



Kaier beaj

Demat, **Marjela** eo ma anv.

Marcelle 'oa anv ma mamm-gozh eus tu ma mamm. E Okitania e oa-hi o chom. Anjela 'oa anv ma mamm-gozh eus tu ma zad. E Breizh e oa-hi o chom.

Deus da bourmen ganin !



Dirak ar goulennoù aesañ e kavi ur graoñenn-gelvez.



Dirak ar goulennoù diaesañ e kavi ur gistinenn flemmus !

Dit-te da zibab ar goulennoù a blijo dit.

Nav rannvro a gaver en **Okitania** : ur vro vras an hini eo ! Ha gouzout a rez pelec'h emañ Okitania war ar gartenn ? **Lak livioù war ar gartenn da ziskouez pelec'h emañ Breizh hag Okitania.**

Faziañ a c'hellez ober : gwiriekat a ri diwezhatoc'h, ma fell dit !



Tro an diskouezadeg 'p eus graet bremañ.
Ha gouest out da anavezout Marcelle hag Anjela ?

Skriv anv pep hini dindan he skeudenn.
Samuel Lewis, un den a orin saoz hag a zo o chom e Breizh, an hini eo en deus treset anezho amañ.

Ha gouest out da lavarout anv menaj pep hini ?
Tres biroù evit liammañ anvioù Marcelle hag Anjela gant anvioù ho menaj. (lak biroù)

Le bas de l'eau	*		
Germont	*	*	Anjela
Traoñ-an-dour	*		
Traoñ-sur-Germont	*	*	Marcelle
Grammont	*		

Piv he deus skrivet « **J'ai tout reçu des gens** » ? Marcelle, Anjela, hini ebet ?.....
Displeg da respont (diwall, bez ez eus ur pech marteze) ?.....

Anjela ha Marcelle a blij e ar gwez dezho. Klask e-barzh an diskouezadeg **pevar anv gwezenn** :

1 2 3 4

Ha posubl eo sevel ur c'hwitell diwar skourroù ar wezenn gistin ? Diwar skourroù ar wezenn skav ?.....
Pa vi er gêr e c'helli mont da selaou son ar c'hwitell-se war al lec'hienn-mañ : <http://www.youtube.com/watch?v=cKKDaLGCbiA>

Klask liammañ tresadennoù an delioù gant anvioù ar gwez :

Gwezenn-derv ●
Gwezenn-gelvez ●
Gwezenn-gistin ●




Penaos e vez lavaret « **écureuil** » e brezhoneg gant Anjela ?.....
« **Kazh-koad** », « **razh-koad** » pe « **bisig ruz** » a vez lavaret ivez.

Klask tresañ amañ dindan :

1) ur c'hazh er c'hoadoù

2) ur c'hazh-koad



Klask penaos e vez lavaret « **skrivañ** » en okitaneg ?.....

Gouzout a rez lavarout « **skrivañ** » e yezhoù all ?.....

Ha te, plijout a rafe dit skrivañ ivez ?

Ma fell dit e c'hellez klask skrivañ ur varzhoneg teir linenn diwar-benn an Natur.

Seu amañ dindan skouerioù gant daou haïkou, barzhonegoù japanat berr-tre.

*Pa dav ar glav
Goustadik e tec'h
An Itron Melc'hwedenn
Fumiko Tamura*

*An itron (g)wennili
A nij gant an avel
Etrezek an oabl glas
Yukako Inoue*

Ma ne fell ket dit skrivañ e c'hellez tresañ ur wezenn pe ul loen bennak.

